

DIRAK UR BEZ

Kregiñ a ra ar mizioù du gant an dibunadegoù dirak beziou tud ar familh, dirak beziou tud tost dimp, dirak beziou mignoned pe mignonezed.

En taol-mañ ne roin nemet ur barzhoneg skrivet pell zo, en-tro 1900 pe se, gant ur beleg, Yann-Vari Gwazdoue, bet ganet en Rospez en 1871 ha marvet en Plistin en 1938.

From, trivliadennoù un den dirak ur bez, hag an den-se a c'hall bezañ n'eus forzh piv ac'hanomp gant e c'hlac'har, e hiraezh, e garantez pe e garanteziou, e bedennoù kristen pe e-maez kement relijion zo, memes.

Herve Bihan

Dirak ur bez (en Sant-Servez)

Me'bliz din, 'kreiz sioulder an noz,  
Selaou mouezh ar wazhig-dour  
A dremen dre ar vered kozh,  
'N ur drouzal ken sioul, ken flour !  
Sioul ha flour, gwazhig, 'vez da vouezh,  
'N ur dremen dre ar vered,  
Ha goût a rez e tremenez  
'Kichen korfoù douaret ?

Deus, ma c'horf, betek ar vered.  
Deus da welet ar beziou !  
Marteze, da zour binniget  
A servijo da zaeroù.  
Dirak ar bez-se, traezh warnañ,  
En-harz ur groaz-venerezh,  
Greomp, mar karez, un dihan ;  
Marteze 'klevfomp ur vouezh.

A-bep tu dimp mann na glevan  
Nemet mouezh ar wazhig-dour,  
Gant trouz an avel o c'hwezhañ  
Gwech-ha-gwech en beg an tour.

Koulskoude, eus ma daoulagad  
E kouezh takennoù daeroù ;  
N'on ket evit harz da c'harmat,  
Daoust da sioulder ar beziou.

Ur vouezh na glev ket ma skouarn  
'Deu da gaout hekleven em c'hreiz,  
D'ober din juntañ ma daouarn,  
Ha lâret : *De profundis*.

Sinet Yann-Vari Gwazdoue

Levrlennadur

Y. M. G. [= Yann-Vari Gwazdoue], Kanaouenno en yez Treger, Sant-Brieg, Ti-Mouleres Sant-Gwilherm, Bali Charner, 1909. [pp. 46-47]

Lukian Raoul, Geriadur ar Skrivagnerien ha Yezhourien Vrezhonek aet da anaon a-raok miz Meurzh  
1992, Al Liamm, 1992. [pp. 114b-115a]